

Henry Jean-Louis (Herri Loeiz Yann) (Lokeored 1861 – Lennon 1941)
An Alvokad Pateleenn, reizet e brezoneg gand Guy Henry.
Bet embannet e 1906. Modernnaet eo bet an doare-skriva.
Drevezet eo ar skrid-mañ deuz “La farce de Maître Parhelin“, bet embannet e 1486.

C’hoarierien

An aotrou Pateleenn, alvokad.
An itron Pateleenn, e bried.
Heriet, he merh.
Laou, marhadour mezer.
Valerian, mab Laou hag amourouz Heriet.
Coleta, matez Pateleenn ha muia-karet ar Pastor.
Pastor, mesaour Laou hag amourouz Coleta.
Bartolin, barner deuz ar gêriadenn.
Eur Peizant.
Kenta mevel Urcher.
Eil mevel Urcher.
An aotrou Gwillou.

Kenta pennad
Kenta leh c'hoari

An aotrou Patelenn,
e-unan.

Greet an taol ; red eo, hirio, memez petra bennag n'em-eus ket eur gwenneg, kaoud din va-unan eur gwiskamant nevez. Mez petra ! Gwell rezon 'zo da lavared, koulz e vefe beza lor evel beza paour. Piou an diaoul, ouz va gwelet gwisket evel-se am hemerfe evid eun alvokad ? Ne lavarfet kentoh e vefen eur skolaer deuz ar vourh-mañ. Abaoe pemzeg devez ma 'm-eus kuitaet ar gêriadenn, en hini¹ 'oan o chom, evid dond d'en em staga el leh-mañ, o kredi ober ennañ gwelloh va aferiou... Mond a reont gwasoh c'hoaz. Me am-eus, deuz ar hostez-se, evid amezeg va homper ar barner deuz al leh. N'eus ket an disterra prosez. Deuz ar hostez all-mañ, eur marhadour mezer pinvidig. N'em-eus ket peadra da brena eun droug habit². A ! Patelenn paour, penaoz e ri-te da gontanti da wreg a fell dezi a-grenn e timezfe da verh. Piou an diaoul a hoantezo anezi, ouz da weled evel-se pillaoeg ? Red mad eo dit, dre forz skoazell an izign³... Ya, poaniom, da 'n em brokuri ; war hle, eun habit mad ha mezer en stal an aotrou, on amezeg. Mar gallan eur wech 'n em rei an doare deuz eun den pinvidig, piou bennag a refuz va merh...(O kemezfe e wreg)⁴. Mez setu aze va gwreg hag he flah, ar re a gomz asamblez diwar va friperez. Selaouom int, heb 'n em ziskwel.

('N em guzad a ra en eur horn deuz an teatr).

¹ en hini : en pehini, er skrid orin. Gouzoud a ree ar galleg gwelloh eged ar brezoneg, evel meur a skrivgner euz an amzer-ze.

² habit : galleg.

³ izign : ?

⁴ (O kemezfe e wreg). : ?

Eilved leh-c'hoari

An itron Pateleenn, Coleta, an aotrou Pateleenn (*kuzet*),

An itron Pateleenn

(*da Goleta*)

O ! se Coleta, n'am-eus ket c'hoantaet komz dit en ti gand na vije va faour-kêz pried ouz or zelaou.

An aotrou Pateleenn

(*en e bart e-unan*).

Setu i aze.

An itron Pateleenn

(*da Goleta*)

C'hoant am-eus e lavarfes din en peleh, va merh, e hell kaoud peadra da vond ken kempenn ha ma'z a.

Coleta

Ahanta ! Se eo, itron, penaoz an aotrou ho pried a ro dezi.

An itron Pateleenn

(*da Goleta*)

Va fried, n'en-deus ket peadra d'en em wiska e-unan.

An aotrou Pateleenn

(*e-unan*)

Gwir eo.

An itron Pateleenn

(*da Goleta*)

Me da gaso kuit, ha ne zimezi ket gand ar Pastor, da amouros, ma ne lavarez ket din an dra evel m'ema.

Coleta

Arsa, itron ! red eo her lavared deoh. Lavarian, pennher an aotrou Laou, ar marhadour mezer pinvideg-se, a zo ochom aze, a zo amouros deuz an dimezell Herriet hag a ra prezantchou dezi eur wech an amzer.

An aotrou Pateleenn

(*e-unan*)

Va merh a zach ganti ivez deuz ar stal en hini am-eus soñj da vond.

An itron Pateleenn

(*da Goleta*)

Mez en peleh e kemer Valerian peadra da ober ar prezantchou-ze ? E dad a zo eun den garo, pinvidig ; ne ro dezañ netra.

Coleta

O ! itron pa ne ro an tadou netra d'o bugale, ar vugale a laer anezo : kement-se 'zo en urz.
ha Valerian a ra evel ar re all ; al lezenn eo.

An itron Pateleenn

Mez, perag ne ra ket goulenn va merh da zimezi ?

Coleta

Greet en dije ivez : mez aon en-deus ne fellfe ket d'e dad koñsanti, abalamour, pa zispiljfe
se deoh, hoh aotrou a vez atao gwisket fall : se a ra barn fall e aferou.

An aotrou Pateleenn

(e-unan)

Da ze eo ez an da lakaad urz.

An itron Pateleenn

(Da Goleta)

Me 'gleo unan bennag : kee kuit.

(Coleta kuit).

Trede leh c'hoari
An aotrou Pateleenn
(o tond euz e doull kuz)
An itron Pateleenn

Ha te 'zo aze ?

An itron Pateleenn

Ya.

An aotrou Pateleenn

O ! na te a zo gwisket !

An itron Pateleenn

O ! mez... me n'on ket fougereer.

An aotrou Pateleenn

An itron Pateleenn

Abalamour ma'z out eur paour-kêz ; ha me 'zo o paouez gouzoud penaoz da baourentez a zihoud⁵ an oll fortuniou en em brezant evid or merh.

An aotrou Pateleenn

Rezon ho-peus : ar bed a varn an dud deuz o dillad. Anzao a ran penaoz ar re a zougan a ra gaou ouz Heriet hag em-eus greet va zoñj d'en em wiska hirio eun tammig propoh.

An itron Pateleenn

Te, propoh, ha gand petra ?

An aotrou Pateleenn
(o c'hoantaad mond kuit)

N'en em laka ket en poan gand se. Kenavo.

An itron Pateleenn

Da beleh ez it, mar plij ?

An aotrou Pateleenn

Me 'zo o vond da brena eun habit mezer.

An itron Pateleenn

Hep kaoud eur gwenneg prena eun habit.

An aotrou Pateleenn

Ya. Deuz peseurt liou eh aliez ahanon da gemer : griz sklêr pe griz teñval ?

An itron Pateleenn

Kleo 'ta ! Kemer anezañ evel ma helli, ma kavez unan bennag diod a-walh da rei dit. Me 'h a da gomz gand Heriet : me 'zo o paouez gouzoud, en gwirionez, traou ha ne blijont ket din.

⁵ zihoud : ?

An aotrou Pateleenn

Mar goulenner ahanon, me 'vezo amañ, e stal on amezeg.

(An itron a ha kuit).

Pevare leh c'hoari

An aotrou Pateleenn

(e-unan)

N'en deo ket serret c'hoaz... Me 'gred ne rafen ket fall mond da wiska va zae alvokad : ouspenn ma kuzo va zruillou, eur zae alvokad a roio muioh a bouez d'ar homzou a glean da lavared d'an aotrou Laou evid dond a-benn euz va zaol. (*ouz hen gweled*). Setu-eñ aze gand e vab : deom d'en em wiska ha distrom dioustu. (*Mond a ra kuit*).

Pemped leh c'hoari.

An aotrou Laou

(gantañ eur pezh mezer brun)

Valerian

An aotrou Laou

(e-unan, o tisplega e bez mezer en diavez e stal)

Komañs a reer ne weler ken ar sklêr e-barz ar stal, diskouezom emma eun nebeud muioh da weled an dremenidi.

(Da Valerian)

O ! amañ, Valerian, em-oa lavaret dit klask din eur mesaer da ziwall va bandenn deñved ar gloan anezo a zervij da ober va mezer.

Valerian

Daoust hag-eñ, va zad, n'oh ket kontant deuz ar Pastor ?

An aotrou Laou

Nann, rag va herez a ra hag em-eus n'az-pezh perz ebed e-barz.

Valerian

Me ?

An aotrou Laou

Ya, te. Gouezet am-eus ez out amourouz, n'ouzon deuz petore plah yaouank tost amañ, hag e rez dezi prezantchou : ha gouzoud a ran penaoz ar Pastor-ze a zo 'n em brometet deuz serten Coleta hag a zo en zervij. Kement-se oll a ra m'am-eus disfi.

Valerian

(eno e-unan).

Piou an diaoul 'n-eus on dizoloet ?

(D'an aotrou Laou)

Me hoh asur, va zad, ar Pastor on zervij gand kalz a lealded.

An aotrou Laou

Ya, te ; mez nann ahanon-me, rag, abaoe eur miz ma 'n-eus kuitet ar merour gand an hini 'oa o chom a-raog antren em zervij, e vank em hont c'hweh-ugent dañvad, ha n'eo ket posubl e ken nebeud all a amzer, e vefe marvet dioute, evel ma lavar, eun niver ken braz gand kleñved an deñved.

Valerian

Ar hleñvejou a ra a-wechou kalz a zistruj.

An aotrou Laou

Ya, gand ar vedisined, mez an deñved n'o-deus ket. A-hend-all, ar Pastor-ze a ra e bladeneg ; mez hennez 'zo eur genaoueg fin hag ar gwsa troideller fallagr... Erfin, tapet am-eus anezañ war an taol, o laza eun dañvad henoz. Bahatet am-eus anezañ. Greet am-eus e appelli dirag ar barner. Koulskoude a-raog poulza an afer, em-eus c'hoantaet gouzoud hag eñ n'ez-poa ket te eur perz bennag el laeroñsi en-deus greet din ?

Valerian

O ! va zad, re a respet am-eus evid ho teñved.

An aotrou Laou

Mond a ran neuze d'hen poursu en justis. Mez c'hoant am-eus enklask eun tamm gwelloh an traou. Ro din va leor kontchou. Tosta ar gador-ze. (*Valerian a ro dezañ eul leor euz e gador*). A-walh eo, lez ahanon. Ma teu eur serjant, am-eus lakaet kerhad d'am goulenn, laka va gervel. Chom a rin eun nebeud amañ c'hoaz beteg gouzoud na deufe eur prener bennag.

Valerian

(en e bart e-unan)

Deom da lavared d'ar Pastor dond da gaoud va zad evid ober gantañ.
(Mond a ra kuit).

C’hwehved leh c’hoari

An aotrou Pateleññ

(e-unan)

Mad, setu-eñ e-unan. Tostaom.

An aotrou Laou

(e-unan ha fouilla e leor)

Kont ar vaondenn⁶, etc... c’hweh-kant loen, etc..

An aotrou Pateleññ

(e-unan, o selled euz ar mezer).

Setu aze eur pez mezer hag a rafe mad va afer ? (*D’an aotrou Laou*). Servijer, aotrou.

An aotrou Laou

(hep selloud outañ)

Daosut hag-eñ e vefe ar serjant am-eus lakaet degas ? Ra hortozo.

An aotrou Pateleññ

Ya, aotrou, me ‘zo...

An aotrou Laou

(o troha e her)

Eur rebenn⁷ ? Ar prokureur eta ? Servicher.

An aotrou Pateleññ

Nann, aotrou/An enor am-eus da veza alvokad.

An aotrou Laou

N’am-eus ket ezomm da alvokad. Me ‘zo ho servijer.

An aotrou Pateleññ

Va ano, aotrou, n’eo ket, douetañs dianavezet ganeoh : me eo Pateleññ, an alvokad.

An aotrou Laou

N ‘hoh anavezan ket, aotrou.

An aotrou Pateleññ

Red eo ‘n em ober anaoud. (*D’an aotrou Laou*). Kavet am-eus, aotrou, en skridou-memor va zad, eur gle ha n’eo ket bet paet, hag...

An aotrou Laou

Va faea ? Gortozit, aotrou, mar plij. Dond a ra eun tamm soñj din deuz hoh ano. Ya, anaoud a ran a-bell zo ho lignez. C’hwi a oa o chom er gêriadenn amañ tost ; ni ‘zo ‘n em anavezet gwechall. Me ‘houleññ eskuz diganeoh ; me ‘zo ho servijer ar muia doujuz hag ar muia sentuz. (*O kinnig dezañ eur gador*). Azezit aze, me ho ped, azezit aze.

An aotrou Pateleññ

⁶ vaondenn : ?

⁷ rebenn : ?

Aotrou !

An aotrou Laou

Aotrou !

An aotrou Pateleenn

(oh azeza)

Ma vefe kement hini a gle din ken aketuz ha me da baea o gle, me ‘vije kalz pinvidikoh evid ma’z on, mez, n’ouzon ket derhel madou va nesa.

An aotrou Laou

Setu koulskoude ar pez a oar mad bremañ kalz tud ober.

An aotrou Pateleenn

Me ‘lavar penaoz, kenta kalite eun den onest, eo paea e hle, hag on deut da houzoud pegoulz e vo êzeet deoh reseo va zri-hant skoed.

An aotrou Laou

Bremaig.

An aotrou Pateleenn

Me ‘m-eus em zi hoh arhant oll prest, ha kontet mad ; mez red eo rei amzer deoh da lakaad ober eur gitañs⁸ dirag noter. Ar re-ze ‘zo taillou deuz eun heritaj hag a zell ouz va merh Heriet, hag e klean⁹ renta deuz se eur gont doareet.

An aotrou Laou

Se ‘zo leal. Kleo ‘ta, mad, warhoaz vintin da bemp eur.

An aotrou Pateleenn

Da bemp eur, mad. Me ‘m-eus, marteze, kemeret fall va foent, aotrou Laou ? Me ‘m-eus aon d’ho tistrei deuz ho labour.

An aotrou Laou

Tamm ebed, n’em-eus nemed re a amzer, ne werzer netra.

An aotrou Pateleenn

C’hwil a ra koulskoude muih a aferou hoh-unan evid an oll varhadourien all deuz al leh-mañ.

An aotrou Laou

Dre ma labouran kalz.

An aotrou Pateleenn

Dre ma’z oh, en gwirionez, an den ar muia gouizieg deuz ar vro-mañ (*o selloud ouz ar pezh mezer*), setu aze eur mezer kaer a-walh.

An aotrou Laou

Kaer-kenañ.

⁸ gitañs : galleg “quittance“

⁹ e klean : e tlean.

An aotrou Pateleenn

C’hwil a ra ho kenwerz gand eur gouiziegez dispar.

An aotrou Gwillou

O ! aotrou !

An aotrou Pateleenn

Eun doare nobl hag eeun, an hini a hounez kalon an oll.

An aotrou Laou

O ! ne ra ket, aotrou.

An aotrou Pateleenn

Pardie¹⁰, liou ar mezer-ze a ra plijadur d’an daoulagad.

An aotrou Laou

M’her hred. Liou kistin eo.

An aotrou Pateleenn

Liou kistin. Nag eñ ‘zo kaer ! Me ‘zo sur, aotrou Laou, c’hwil ho-peus roet dezañ al liou-ze.

An aotrou Laou

A ! A ! A !

An aotrou Pateleenn

Ar gloan-mañ a zeblant beza kondisionet mad.

An aotrou Laou

Hennez ‘zo en gwiriongloan saoz.

An aotrou Pateleenn

M’her hred... Pa gomzom deuz Bro-Zaoz, seblantoud a ra din, aotrou Laou, ‘vezem bet gwechall er skol asamblez.

An aotrou Laou

En ti an aotrou Nikodem ?

An aotrou Pateleenn

Justamant. C’hwil ‘oa kaer evel ar garantez.

An aotrou Gwillou

Klevet am-eus laavred se d’am mamm.

An aotrou Pateleenn

Ha c’hoaz te zeske ar pez a gares.

An aotrou Laou

¹⁰ Pardie : galleg : Par Dieu.

Me 'ouie lenn ha skriva.

An aotrou Pateleenn

Pebez domaj ma n'oh ket en em lakaet en aferou braz. Gouzoud a rit-hu, aotrou Laou, c'hwi ho-pije gouarnet eur vro.

An aotrou Laou

Evel eun all.

An aotrou Pateleenn

Setu. Me 'm-oa just em spered eur liou mezer evel hennez. Soñj am-eus penaoz va gwreg e fell dezi e rafen dezi eun habit. Me 'gred penaoz, warhoaz vintin, da bemp eur, en eur degas deoh ho tri-hant skoed, me 'gemero marteze deuz ar mezer.

An aotrou Laou

M'hen dalho deoh.

An aotrou Pateleenn

Hen derhel !... N'eo ket aze ema va hont. (*Da Laou*). Evid prena eul leve em-boa lakaet a-gostez, er mintin-mañ, daouzeg-kant lur, diouz ar re n'am-boa ket a hoant da douch, mez gweled a ran mad, aotrou Laou, ho-po eul lodenn dioute.

An aotrou Laou

Na lezit ket hep prena ho leve, c'hwi 'po atao deuz va mezer.

An aotrou Pateleenn

Her gouzoud mad a ran ; mez ne garan ket kemer war hle. Na ! me 'gemer plijadur ouz ho kweled fresk ha laouen ! Na pebez êr a yehed hag a vuhez hir.

An aotrou Laou

Me 'zo yah.

An aotrou Pateleenn

Pegement e kredit am-mefe ezomm deuz ar mezer-ze, abalamour da heul ho tri-hant skoed ma tegasan ivez a-walh d'her paea ?

An aotrou Laou

Ezomm ho-po... C'hwi a fell deoh, heb douetañs, eun habit penn-da-benn.

An aotrou Pateleenn

Ya, penn-da-benn, jiletenn, bragou, rochedenn, doublet er memez danvez o-oll hir a-walh ha ledan a-walh.

An aotrou Laou

Evid se ho-pefe ezomm... Ya, c'hweh gwalenn. Mar kerit, me o zroho da hortoz.

An aotrou Pateleenn

Da hortoz...Nann, aotrou, nann, an arhant en dorn, mar plij : hennez eo va mod.

An aotrou Laou

Mad-tre eo. (*E-unan*) Setu amañ eun den aketuz.

An aotrou Patelenn

N'ho-peus ket a zoñj, aotrou Laou, euz eun devez on-doa koaniet asamblez en otel de Frañs.

An aotrou Laou

En devez ma oe greet ar pardon en Kêriadenn.

An aotrou Patelenn

Gand gwirionez, komz a rejom, da fin ar pred, war an aferou a ren ; me ho klevas o komz a draou kaer.

An aotrou Laou

C'hwi ho-peus soñj.

An aotrou Patelenn

Ya, soñj am-eus. C'hwi a lavaras neuze oll ar pez on-eus gwelet abaoe en pronostig Nostradamus.

An aotrou Laou

Me 'wel an traou a-ziabell.

An aotrou Patelenn

Pegement, aotrou Laou, a refet din paea ar walenn deuz ar mezer-ze ?

An aotrou Laou

(o selled ouz ar merk)

Gwelom, ma feiz, unan all e paefeh ennañ, c'hweh skoed, mez deoh, alo, me 'roio anezañ deoh evid pemp skoed.

An aotrou Patelenn

Ar Judeo ! (da Laou). Se 'zo re onest. C'hweh gwech pemp skoed, se raio eeun.

An aotrou Laou

(o tronha eh ez)

Tregont skoed.

An aotrou Patelenn

Ya, tregont skoed : ar gont 'zo mad.... Pardie, evid adober anavezidigez, red eo deom debri warhoaz da leina eur hanard en-deus roet din eun alvokad en kado.

An aotrou Laou

Eur hanard ; o haroud a ran kalz.

An aotrou Patelenn

Gwell a ze. Greet an taol ; kenavo, warhoaz, lein. Va gwreg a fourchas burzuduz....Dre va feiz, inouet on, abalamour dezi da weled eur wiskamant deuz ar mezer war va horv ; kredit, o kemer anezañ warhoaz e vo prest a-benn lein.

An aotrou Laou

Ma ne roit ket amzer d'ar hemener, e kolllo anezi dezañ.

An aotrou Pateleñ

Eur holl braz e ve.

An aotrou Laou

Grit kaerroh. C'hwi ho-peus, ha lavaret, arhant prest.

An aotrou Pateleñ

Anez n'em-oa ket prenet.

An aotrou Laou

Me 'ya kas da ober kas anezañ deoh gand unan deuz va mevelien. Dond a ra da zoñj din ez eus aze trohet, evel zo¹¹ red, ar pezh a fell deoh.

An aotrou Pateleñ

(o kemer ar mezer)

Se 'zo eüruz.

An aotrou Laou

Gortozit. Red eo da genta her muzula dirazoh.

An aotrou Pateleñ

Daoust ha n'em-eus ket a fiziañs ennoh ?

An aotrou Laou

Roit anezañ din ; me 'h a da lakaad hen kas deoh ha c'hwi e zegaso din en distro.

An aotrou Pateleñ

(o troha e gomz)

An distro, nann, nann : na ambuzit ket ho tud ; n'am-eus nemed daou baz da ober ahann d'am zi... Evel ma lavarit, ar hemener en-do muih a amzer.

An aotrou Laou

Lezit ahanon da rei deoh eur mevel a zegaso din an arhant.

An aotrou Pateleñ

E !Ket, ket. Me n'on ket tougeer¹² ; kazi noz eo ha dindan va zae alvokad e kemerfen anezañ evid eur zah da lakaad paperou eur prosez.

An aotrou Laou

Mez, aotrou, me 'h a da rei deoh atao eur mevel evid degas din...

An aotrou Pateleñ

(o troha e her)

E ! ardou ebed a lavaran deoh...Da bemp eur just tri-hant tregont skoed hag ar hanard da leina ; kenavo, va amezeg ker, ho servijer...E ! ho servijer.

¹¹ zo : ma'z eo

¹² tougeer : ? (bet skrivet fall el leor orin ?)

An aotrou Laou

Servijer, aotrou, servijer.
(*An aotrou Pateleenn ah a d'ar gêr*).

Seizved leh c'hoari

An aotrou Laou

(*e-unan*)

Mond a ra d'ar gêr, pardie ! gand va mezer ! mz n'eus ket a-bell ahann da bemp eur warhoaz vintin. Leina a rin en e di hag e paeo ahanon, paea a ray ahanon.... Setu aze, pardie, unan deuz an onesta ha koñsiañsusa alvokaded am-eus gwelet em buhez. Keuz am-eus beza gwerzet dezañ ar mezer-ze re ger, êogiwre e c'hoanta paea din an tri-hant skoed, war ar re ne gonten ket rag n'ouzon ket e beleh an diaoul e teu ar gle-ze. Mez, na pebez boneur vad ; gand se ema noz, ha setu aze, emañ o soñjal e toud ar pezh a hounezan hirio. (*O hervel*) Hop ! ola ! ra vo dastumet an oll varhadourez en diabarz ar stal... Mez setu amañ a gredan ar Pastor fallig en-deus laeret din va deñved !

Eizved leh c'hoari

Ar Pastor. An aotrou Laou

An aotrou Laou

A ! A !, laer. Me a hell ober amañ aferou mad : ar fallagr-mañ a gas gantañ an oll gounidegez.

Ar Pastor

Abardaevez mad, aotrou, ha noz vad.

An aotrou Laou

Te 'gred c'hoaz dond dirazon ?

Ar Pastor

Setu amañ, na pa zisplijfe deoh, va mestr mad, penaoz eun aotrou en-deus roet din eur paper, hag a gaoze, e levere deuz deñved, deuz barner, deuz distroidigez.

An aotrou Laou

Te 'ra da bladenneg, mez me 'lavar dit ne lazi birviken ken dañvad ebed : dalh soñj mad.

Ar Pastor

O ! va mestr mad, na gredit ket an teodou fall.

An aotrou Laou

An teodou fall ! kokiñ. N' am-eus-me ket kavet ahanout eun nozvez o laza eun dañvad ?

Ar Pastor

M'hen tou deoh. Me 'oa o vired outañ da vervel.

An aotrou Laou

Laza anezañ, da vired outañ da vervel.

Ar Pastor

Ya, deuz kleñved an deñved, abalamour, na pa ne veh kontant, pa varvont gand ar hleñved louz-se e ranker teurel o hig kuit, hag o lazer a-raog ma teuont da vervel.

An aotrou Laou

A-raog ma vervont, an treitour ! deñved ar gloan anezo a ra din mezer saoz., a werzan pemp skoed ar walenn... Kerz kuit ahann, den milliget, c'hwhéh-ugent dañvad en eur miz.

Ar Pastor

Lakaad a reent ar re all da gleñvel, dre va feiz !

An aotrou Laou

Ni 'welo se warhoaz dirag an aotrou Barner.

Ar Pastor

O ! va mestr tener, en em gontañtit da veza va skoet evel ma welit, hag en em reom on-daou mar gleo ho madelez.

An aotrou Laou

Va madelez eo d'az krouga, entent a rez ?

Ar Pastor

An Neñv da rei joa deoh.

(An aotrou Laou a ya d'e di).

Naoved leh c'hoari

Ar Pastor

(e-unan)

Red eo din eta mond da gaoud eun alvokad evid divenn va gwir droed.

Degved leh c'hoari

Valerian. Herriet. Coleta. Ar Pastor

Herriet

(da Valerian)

Lezit ahanon, Valerian : va zad ha va mamm am heuill. Mond a reom da goania da di va zintin. Lavaret he-deus din mond d'o haoud ; en em dennit.

Ar Pastor

(Da Valerian)

C'hoant ho-peus, aotrou, e lazfen ar goulou.

Valerian

Nann. Mired a refes ouzin ar blijadur d'he gweled. *(Da Herriet)*. Herriet kaer, permetit, mar plij...

Herriet

(o troha e êz)

Nann, Valerian, krena a ran.

Valerian

Disfi ho-peus deuz eun den hag a ador ahanoh.

Herriet

C'hwi eo an den am-esu aon araozañ ar muia er bed, ha gouzoud a rit perag. *(Da Goleta)*. Na ouitezit ket ahanon, Coleta.

(Ar Pastor a denn Coleta dre he breh).

Coleta

An didalvez-mañ a zach ahanon dre va breh.

Herriet

(Da Valerian)

Ma karit ahanon, na zoñjit ket ennon. Me ho ped, nemed pa vefet sur deuz konsañtamant va zad.

Coleta

Da ze eo ar Pastor ha me on-deus soñjet en em implija.

Ar Pastor

Kavet am-eus eur voyenn onest hag a deuio a-benn deuz an taol, mar plij da Zoue, pa vin er-mêz a brosez.

Valerian

Petra bennag a erruo, me a warantiso ahanout a zond.

Herriet

(o weled an aotrou Pateleenn)

Erru eo va zad : deom oll kuit.

(Oll o vond kuit)

Unegeved leh c'hoari

An aotrou Pateleenn. An itron Pateleenn

An aotrou Pateleenn

Ahanta, va fried, ar mezer-mañ, daoust hag-eñ a zo choazet mad ?

An itron Pateleenn

Ya, mez gnd petra her paea ? Her prometa ah-eus warhoaz vintin : an aotrou Laou-ze, a zo eun Arab hag a deuio amañ da ober e ziwall a bevar.

An aotrou Pateleenn

Pa deuio : soñj hepken ober ar pezh a lavarinn dit, ha me a zikouro ahanout.

An itron Pateleenn

Red eo, en despet din, da zikour d'en em denn, mez gleoud a refes ruzia gand ar vez deuz ar pezh a lavarez din da ober rag n'en deo, en giz ebed, oberou eun den onest.

An aotrou Pateleenn

O ! va Doue, va fried, evel eun den onest. N'eus netra êzetoh pa vezer pinvidig, evid beza den onest. Pa vezer paour eo diêz beza, mez lezom an oll draou-ze ha deom da goania da di da hoar. Kerkent ha ma vezim distro, greom fenez tailla an habit, gand aon rag gwallzarvoud.

An itron Pateleenn

Mad, mez diwall evelkent na errufe amañ warhoaz eun dizurz bennag.

Eizved pennad Kenta leh c'hoari

An aotrou Laou
(e-unan ouz al leh c'hoari)

An aotrou Pateleenn
(e-unan en e di)

An aotrou Laou
(en e bart e-unan)

Dever eun den ingalet mad, eo ober e gont deuz ar mintin deuz ar pezh a dle ober e-pad an deiz : gwelom eun nebeud. Da genta e tlean reseo tri-hant skoed digand an aotrou Pateleenn, evid eun dle deuz perz e dad desedet ; hag ouspenn tregont skoed evid c'hweh gwalenn vezer en-doa kemeret amañ deh ; c'hoaz, eur hanard 'oa da leina en e di prientet gand e wreg ; goude-ze komparisa d'an appellidigez dirag ar barner hag 'eneb ar pastor deñved evid c'hweh-ugent dañvad en-deus laeret din. Setu oll, me 'gred (*o selled ouz e vontr*). Mez pasianted ? Pell zo eo paseet ar poent, ha ne welan ket va den o tond : deom d'e gaoud. Nann, eun den ken aketuz ne fazio ket d'e her. Koulskude, va mezer 'zo gantañ, ha n'em-eus kelou ebed... Penaoz ober ? Groom ar van d'ober dezañ gweladenn, ha gouezom eun nebeud petore kistion 'zo. (*o selaou e-tal dor an aotrou Pateleenn*), Me 'gred ema o konta va arhant (*o c'hwesa an nor*). Me 'zant c'hwez ar hanard. Skoom.

(Skei a ra).

An aotrou Pateleenn
(en e di)

Va fried.

An aotrou Laou
(En e bart e-unan)

En he-unan eo.

An aotrou Pateleenn
(en e di)

Digorit an nor... Setu an apotiker.

An aotrou Laou
(Ennañ e-unan)

An apotiker.

An aotrou Pateleenn
(en e di)

A zegas din louzou tu pe du. Louzou da re...che...ti.

An aotrou Laou
(Ennañ e-unan)

Louzou tu pe du. Unan bennag klañv 'zo en e di, ha galloud a hellfen nompas anavezoud e vouez a-dreuz an nor. Skoom c'hoaz kreñvoh.

(Skei a ra)

An aotrou Pateleenn

(en e di)

Gwall vaouez. ma'z... ka... rez... an den. Digeri... a...ri...-te... ?

Eilved leh c'hoari

An itron Pateleenn. An aotrou Laou

An itron Pateleenn

(a-vouez izel)

A ! C'hwi eo, aotrou Laou.

An aotrou Laou

Ya, me eo. C'hwi eo, heb douetañs ebed, an itron Pateleenn ?

An itron Pateleenn

D'ho servija... Trugarez, aotrou...Ne gredan ket kaozeal kreñv...

An aotrou Laou

O ! Komzit evel ma karfet. Me 'zo deuet da weled an aotrou Pateleenn.

An itron Pateleenn

Komzit sioulloh, aotrou, me ho ped.

An aotrou Laou

E ! Perag sioulloh ? Me a zo deut, a lavaran deoh, da ober dezañ gweladenn.

An itron Pateleenn

Sioulloh c'hoaz, me ho ped.

An aotrou Laou

Ken sioul ha ma kerfet, mez red eo din her gweled.

An itron Pateleenn

Allaz ar paour-kêz den, er stad vad ema da veza gwelet.

An aotrou Laou

Penazo ? Petra 'zo erruet gantañ abaoe deh ?

An itron Pateleenn

Aboe deh ? Allaz, aotrou Lao, eiz deiz 'zo n'en-deus ket fiñvet deuz e wele.

An aotrou Laou

Deuz e wele ? Bet 'oa koulskoude deh em zi.

An itron Pateleenn

Eñ ? En ho ti ?

An aotrou Laou

Ya, eñ ! em zi. yah mad 'oa zoken, ha dispoz.

An itron Pateleenn

A ! aotrou, red eo, heb douetañs ebed, ho-pefe huñvreet se en noz-mañ.

An aotrou Laou

A ! pardie. Kement-mañ n'eo ket fall, huñvreet ? Ha va c'hweh gwalenn vezer a oa eet gantañ. Hen huñvreet am-eus ?

An itron Pateleenn

C'hweh gwalenn vezer ?

An aotrou Laou

Ya, C'hweh gwalenn vezer, liou kistin, hag eur hanard a gleem debri da lein ? E, hen huñvreet am-eus ?

An itron Pateleenn

Na, c'hwi 'gemer fall ho poent evid goapaad.

An aotrou Laou

Evid goapaad ? vantagechienn¹³ ! Me ne hoapaan ket ; n'am-eus c'hoant ebed d'hen ober. Me 'lavar deoh e kasas gantañ, deh, dindan e zae alvokad, c'hweh gwalenn vezer.

An itron Pateleenn

Allaz ! Ar paour-kêz den, gwelloc'h e vije dezañ beza bet er stad d'hen ober. A ! Aotrou Laou ! Deh en-doa bet eur boan benn braz hen talas en eun alter en hini a gredan ema bepred.

An aotrou Laou

A ! dre ar penn glaz, c'hwi a huñvre hoh-unan, ha me 'fell din a-grenn komz outañ.

An itron Pateleenn

O ! evid se, er stad m'ema, n'eo ket posubl ! Lakaet on-deus anezañ en eur gador vouret en-tal an nor evid ober e wele. M'her gwelfet e refe truez deoh.

An aotrou Laou

Mad, mad, truez. (*O c'hoantaad antren en kambre an aotrou Pateleenn*). En pe stad bennag e hell beza, me 'bretant e weled, pe...

An itron Pateleenn

(*O troha e gomz*)

A ! Na zigorit ket an nor-ze, c'hwi 'ra da laza va fried ! Dond a ra dezañ, a amzer da amzer, c'hoant redeg ! (*O weled o tond an aotrou Pateleenn, e benn palet*). A ! setu-eñ partiet.

¹³ vantagechienn : ? (marteze diwar "mantruz")

Trede leh c'hoari

An aotrou Pateleenn. An Itron Pateleenn. An aotrou Laou.

An itron Pateleenn

(D'an aotrou Laou)

Her lavaret em-boa deoh... Sikourit ahanon d'hen tapoud... *(D'an aotrou Pateleenn)*. Va fried paour, diskuiz aze.

(Arreti a ra an aotrou Pateleenn hag ez a da glask eur gador vourret en antre an ti evid her lakaad da azeza).

An aotrou Pateleenn

(Azezet hag o youhal)

Ayou ! ayou ! Va fenn !

An aotrou Laou

(e-unan)

En gwirionez, setu aze eun den eur stad truezuz !... Me 'gred koulskoude eo ar memez hini evel deh, war hed nebeud. Gwelom a-dostoh. *(D'an aotrou Pateleenn)*. Aotrou Pateleenn, me 'zo ho servijer.

An aotrou Pateleenn

A ! deuz mad, aotrou anodiñ.

An aotrou Laou

Aotrou Anodiñ ?

An aotrou Pateleenn

Ho kemer a ra evid an apotiker. Kit kuit.

An aotrou Laou

Ne din ket. *(D'an aotrou Pateleenn)*. Aotrou, soñj ho-peus pnaoz deh ?

An aotrou Pateleenn

(O troha e her).

Ya, greet am-eus derhel deoh...

An aotrou Laou

(e-unan)

Mad, soñj he-deus.

An aotrou Pateleenn

Eur werennad vraz deuz va zroaz.

An aotrou Laou

N'em-eus netra da ober gand troaz.

An aotrou Pateleenn

(d'an itron Pateleenn)

Va fried, diskwel anezañ d'an aotrou Anodiñ : gweled a raio hag-eñ a zo eul luziadenn bennag en gwazied an troaz.

An aotrou Laou

Mad, mad, gwazied... Aotrou, me 'm-eus c'hoant da veza paeet.

An aotrou Pateleenn

Mar gwelheh eun nebeud sklêrraad ar pez a rentan, kaled int evel an houarn ha du evel ho paro.

An aotrou Laou

Ta, ta, ta, setu aze, paeit ahanon en moneiz kaer !

An itron Pateleenn

E ! aotrou, it kuit ahann.

An aotrou Laou

Neanterezou¹⁴ ! (*D'an aotrou Pateleenn*). Kontit din-me arhant ; me 'me-eus c'hoant beza paeet.

An itron Pateleenn

Na roit ken din deuz ar boulou louz-se ; darbet eo dezo ober din renta va ene.

An aotrou Laou

Me 'garje o-dije greet dit renta din va mezer !

An aotrou Pateleenn

(*D'an itron Pateleenn*)

Va fried, kas kuit, kas kuit ar malvennou du-ze ha nij en-dro din... Nag int a zao !

An aotrou Laou

(*D'an itron Pateleenn*)

Me ne welan ket dioute.

An itron Pateleenn

Ne welit-hu ket ema oh alteri ? It kuit.

An aotrou Laou

Gwenterez ! Me 'm-eus c'hoant kaoud va arhant.

An aotrou Pateleenn

Ar vedisined o-deus lazet ahanon gand o drogachou.

An aotrou Laou

(*D'an itron Pateleenn*)

Ne alteri¹⁵ ket bremañ... Red eo din komz outañ. (*D'an aotrou Pateleenn*). Aotrou Pateleenn ?

¹⁴ Neanterezou : ? Marteze : neant terezennou (?)

¹⁵ alteri : ? Marteze eur fazi doare-skriva el leor orin.

An aotrou Pateleenn

Ho tivenn kaoz emañ, evid Homer.

An aotrou Laou

Evid Homer ?

An aotrou Pateleenn

A-eneb ar gornadonez Kalipso.

An aotrou Laou

Kalypso, petra an diaoul eo kement-se ?

An itron Pateleenn

Alteri a ra, a lavaran deoh.. It kuit, sortiit, me ho ped.

An aotrou Laou

A ! re all.

An aotrou Pateleenn

Beleien Jupiter, ar horibanted¹⁶, her hemeret en-deus, eñ 'za gantañ D'ar has ! D'ar has !
Kenavo, va hig sall.

An aotrou Laou

O ! se, pa ho-pezo alteret a-walh paea a refet din-me da nebeuta va zregont koed ?

An aotrou Pateleenn

E doull kao ne zidone mui deuz kan tener e vouez.

An aotrou Laou

E-unan

Arsa, ha kemeret am-efe unan all evitañ ?

An itron Pateleenn

E ! aotrou, lezit en peoh, an den paour-ze.

An aotrou Laou

Gortozit, marteze en-do eun ehan bennag ; selled a ra ouizn evel p'en-defe c'hoant komz ganen.

An aotrou Pateleenn

A ! aotrou Laou.

An aotrou Laou

(D'an itron Pateleenn)

O ! va anaoud a ra. *(D'an itron Pateleenn)*. Ahanta !

An aotrou Pateleenn

Me 'houleñ ouzoh pardon.

¹⁶ ar horibanted : ?

An aotrou Laou
(*D'an itron Pateleenn*)

Gweled a rit en-deus soñj.

An aotrou Pateleenn
(*D'an aotrou Laou*)

Ma, abaoe pemzeg deiz ma emañ er gêriadenn n'on ket eet d'ho kweled.

An aotrou Laou

Morbleu. N'eo ket aze emañ va hont. Koulskoude deh...

An aotrou Pateleenn

Ya, deh, evid ober deoh va eskuziou ha kased deoh eur prokureur deuz va mignoned.

An aotrou Laou
(*E-unan*)

Vnetre distag ! Henez en-defe bet va mezer. Eur prokureur ! Ne welin ken anezañ em buhez. (*D'an aotrou Pateleenn*). Mez se 'zo eur gaou, ha den all nemedoh n'en-deus ket va mezer, dre ar merkou...

An itron Pateleenn
(*o sevel*)

Al lez-varna welo, mar plij gantañ... penaoz ar pyrig a oa eun dañs ta, ral, la la la, (*o kemer an aotrou hag oh ober dezañ dañsal*). Dañsom oll, dañsom oll. Va homer na me a dañs.

An aotrou Laou

O ! ne hellan mui ken, me 'rank kaoud arhant.

An aotrou Pateleenn
(*E-unan*)

O ! me 'raio dit mond ahann... (*D'an itron Pateleenn*). Va fried, va fried ! me 'gleo laeron o tigeri an nor : ne glevez ket te anezo ? Selaoum. Peoh ! peoh, selaouom... Ya, setu-int aze, m'o gwel. A ! kokined, me ho kaso kuit ahann... Va hleze, va hleze (*Mond a ra da gemer eur hleze en antre an ti hag e tistro*). D'al laer ! d'al laer !

An aotrou Laou
(*E-unan*)

Dedie¹⁷ ! N'eo ket brao beza amañ. ar Doue, an oll a laer ahanon, unana va mezer, unan all va deñved, mez da hortoz kaoud rezon deuz hemañ, me 'h a da lakaad krouga egile.

(*Mond a ra kuit*).

¹⁷ Dedie : deuz ar galleg "Nom de Dieu !"

Pevare leh c'hoari

An itron Pateleenn

Mad ! Setu-eñ partiet. Me 'h a d'en em denn, mez chom aze eur pennad c'hoaz, gand aon na zistrofe.

An aotrou Pateleenn

Setu-eñ amañ... D'al laer. An aotrou Bartolin eo. Va gwelet en-deus.

Pemped leh c'hoari

An aotrou Bartolin. An aotrou Pateleenn.

An aotrou Bartolin

Piou a gri d'al laer ? Peseurt trouz a reer e-tal va dor. Peseurt dizurz eo kement-mañ ?
A ! c'hwi o va homper.

An aotrou Pateleenn

Me eo an hini.

An aotrou Bartolin

En dalhidigez-se !

An aotrou Pateleenn

Beza eo... Kredet am-eus...

An aotrou Bartolin

Eun alvokad dindan an armou.

An aotrou Pateleenn

Me 'grede kleved...

An aotrou Bartolin

Militant kauzarum patroni.

An aotrou Pateleenn

Beza eo, a lvaren deoh, ma kreden kleved laeron o forsi va dor.

An aotrou Bartolin

Forsi eun nor, coram judici.

An aotrou Pateleenn

Me grede, a lavaran deoh, e oa laeron aze.

An aotrou Bartolin

Red o rei da houd deuz se.

An aotrou Pateleenn

(o troha e her)

Mez ne oa ket.

An aotrou Bartolin

(hep selaou)

Lakaad testou.

An aotrou Pateleenn

(o troha e her)

A-eneb piou ?

An aotrou Bartolin

(hep selaou)

Ha lakaad o hrouga.

An aotrou Pateleenn

(o troha e her)

Ha krouga piou ?

An aotrou Bartolin

(hep selaou)

Truez ebed ouz al laeron.

An aotrou Pateleenn

Lavared a ran deoh eur wech c'hoaz ne oa hini ebed,hag on en em dromplet.

An aotrou Bartolin

A ! A ! Evel-se eo hemañ, cedant arma togæ. It da guitaad ar hleze-ze, ha kemer ho sae alvokad evid dond d'an aodiañs¹⁸ a roin a-benn eun eur amañ.

(Mond a ra kuit).

¹⁸ aodiañs : galleg ; breujou.

C'hwehved leh c'hoari

An aotrou Pateleenn

(e-unan)

Setu ivez ar pezh ah an da ober. Klevoud a ran divenn kaoz eur serten pastor, ag an hini Coleta he-deus komzet din. Kredi a ran ema amañ. Deom da ziwiska an tarou-mañ ha distroom buan.

Seizved leh c'hoari

Coleta. Ar Pastor

Coleta

Ezomm ho-peus deuz eun alvokad izignuz¹⁹ ha ruzet, hag invanto²⁰ eun trubarderez bennag evid da denna a da afer. Ha n'en-deus er gêriadenn oll nemed an aotrou Pateleenn a ve gouest da ober se.

Ar Pastor

Greet e-moam an egspériañs, va breur desedet ha me. bremañ zo eun nebeud amzer, mez n'ouozn penaoz ober, rag n'em-oa ket her paeet.

Coleta

N'en-devo ket a zoñj deuz se marteze. Da nebeuta na lavar ket dezañ emout mevel gand an aotrou Laou. Ne fello ket marteze da zivenn a-eneb hennez.

Ar Pastor

Ne gomzin outañ nemed ouz va mestr, heb e eñvel, hag e kredo penaoz ez on bepred fermour gand ar fermour e oan gantañ pa oan 'n em brometet dit.

Coleta

(o weled an aotrou Pateleenn o tond)

Setu aze da alvokad. Kenavo.

(Antreal a ra e ti an aotrou Pateleenn)

¹⁹ izignuz : ijineg.

²⁰ invanto : galleg.

Eizved leh c'hoari

An aotrou Pateleenn. Ar Pastor

An aotrou Pateleenn

(e-unan)

A ! A ! Me anavez an haillevod-mañ. (*D'ar Pastor*). N'eo ket te zo 'n em brometet d'am matez Coleta ?

Ar Pastor

Ya, aotrou, ya.

An aotrou Pateleenn

C'hwi 'oa daou vreur am-oa miret deuz ar galeou : unan ahanoh ho-taou n'am faeas ket.

Ar Pastor

Va breur 'oa.

An aotrou Pateleenn

Bet 'oah klañv o sortial deuz ar prizon, hag unan ahanoh a varvas.

Ar Pastor

N'eo ket me 'oa.

An aotrou Pateleenn

Gweled mad a ran.

Ar Pastor

Bet oan bet koulskoude klañvoh evid va breur. Erfin deut on d'ho pedi da zivenn va haoz a-eneb va mestr.

An aotrou Pateleenn

Da vestr, daoust hag-eñ e vefe ar feurmier a zo tost aze ?

Ar Pastor

N'ema ket o chom pell ahann. Me ho paeo mad.

An aotrou Pateleenn

Me 'gred e ri evel-se. Kont din da afer hep kuzed netra.

Ar Pastor

C'hwi a ouezo eta penaoz va mestr mad a bae din eur gajou bihan-tre, ha penaoz evid 'n em digoll, heb ober domaj dezañ, e ran marhajou bihan gand eur heginer... eun den mad.

An aotrou Pateleenn

Peseurt marhad a rez ?

Ar Pastor

Nemed ho trugarez ; mired a ran ouz an deñved da vervel gand kleñved an deñved.

An aotrou Pateleenn

N'eus droug ebed en se. Ha petra a rez evid kement-se ?

Ar Pastor

Ne zisplijfe se deoh. O laza a ran p'o-devez c'hoant mervel.

An aotrou Pateleenn

Ar remed a oa gwirion, mez ne lazez-te ket anezo gand mennoz evid rei da gredi d'az mestr int marvet gand an droug-se, hag e vije red o zeuler en toull teil, evid o gwerza ha derhel an arhant evidout.

Ar Pastor

Se eo a lavar va mestr. Abalamour en noz all pa 'm-oa lakaet va bandenn loened en o hraou, e welas e kemeris unan. Lavared a rin oll deoh ?

An aotrou Pateleenn

Ya. Ma 'h-eus c'hoant e kazoefen evidout.

Ar Pastor

En noz all eta, e welas e kemeris eur pezh maout, hag a oa yah mad. Ma feiz ! hep, heb e zoñjal, dre ne ouie petra da ober, me 'm-oa lakaet goustadig va hontell en kichenn e houzeg, kement eo, ma ne ouzon ket penaoz 'oa erruet, mez mervel da genta.

An aotrou Pateleenn

Kleved a ran. Unan a welas ahanout oh ober ?

Ar Pastor

Va mestr a oa kuzet e-barz e hraou. Lavared a reas din em-oa greet kemend all da hweh-ugent dañvad a vanke dezañ. Hogen c'hwi 'ouezo penaoz eo eun den hag a lavar atao ar wirionez. Kanna a reas ahanon, evel ma welit, hag eh an d'en em louzaoui. Hogen me ho ped evel ma'z oh alvokad, da ober en heveleb feson ma 'nevo tor²¹ ha me rezon evid ma ne gousto netra din.

An aotrou Pateleenn

Kompren a ran da afer. Diou feson 'zo 'en em gemer evid ar genta na gousto dit netra.

Ar Pastor

Kemerit hounnez, me ho ped.

An aotrou Pateleenn

Ra vezo evel-se. Da oll beadra 'zo en arhant ?

Ar Pastor

O ! feiz ! ya.

An aotrou Pateleenn

Red eo dit her huzad mad.

Ar Pastor

²¹ tor : galleg ; gaou.

Ober a rin.

An aotrou Pateleenn

Da vestr a vo forset da baea an oll frejou.

Ar Pastor

Gwell a ze.

An aotrou Pateleenn

Hag hep ma koustfe dit na diner na liard.

Ar Pastor

Se eo a houlenan.

An aotrou Pateleenn

Oblijet e vefet, mar karfe, da lakaad da grouga.

Ar Pastor

Kemerom eben, mar plij ganeoh.

An aotrou Pateleenn

Setu hi amañ, ober a refeh da zegas dirag ar barner.

Ar Pastor

Ha gwir.

An aotrou Pateleenn

Dalh soñj mad a gement-mañ.

Ar Pastor

Memor vad am-eus.

An aotrou Pateleenn

Da gement goulenn a refer dit, pe ar barner, pe alvokad da vestr, pe me va-unan, na respont netra all, nemed ar pezh a glevet bemdez gand da loened gloaneg. Gouzoud a ri komz en o yez hag ober da zañvad.

Ar Pastor

Se n'eo ket gwall-ziêz.

An aotrou Pateleenn

An taoliou ah-eus bet war da benn a zegas din eur zoñj a finese hag a hello da warantisa. Mez pretanti a ran beza paeet mad goude.

Ar Pastor

Beza vefet ivez, m'hen asur deoh.

An aotrou Pateleenn

An aotrou Bartolin ah a da zond bremaig da rei aodiañs ne vank ket da zistrei d'am haoud. Va haoud a ri amañ, kenavo. Na vank ket da zegas arhant ganit.

Ar Pastor

Servijer deoh. Nag an dud vad o-deus poan o veva.

Trede lodenn

Kenta leh c'hoari

An aotrou Bartolin. An aotrou Pateleenn. Ar Pastor.

An aotrou Bartolin

(d'an aotrou Pateleenn)

On sur, ar partiou a hell dond dirazon.

An aotrou Pateleenn

(Sioul. D'ar Pastor)

Pa iñterogfer ahanout, na respont nemed er feson m'am-eus lavaret dit.

An aotrou Bartolin

(d'an aotrou Pateleenn)

Peseurt den eo hennez ?

An aotrou Pateleenn

Eur pastor a zo bet kannet gand e vestr, hag en eur vond ahann ha da lakaad 'n em operi.

An aotrou Bartolin

Red eo gortoz ar parti eneb, e brokureur pe e alvokad, mez petra 'fell d'an aotrou Laou ?

Eilved leh c'hoari

An aotrou Laou. An aotrou Bartolin. An aotrou Pateleenn. Ar Pastor.

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Laou)

Me 'deu da zivenn va-unan va afer.

An aotrou Pateleenn

(Sioul. D'ar Pastor)

A ! Treitour ! A-eneb an aotrou Laou ez out.

Ar Pastor

Ya. Eñ eo ar mestr.

An aotrou Pateleenn

(E-unan)

Poaniom d'en em denn ahann.

An aotrou Laou

Ola ! Peseurt den a zo aze ?

An aotrou Pateleenn

Aotrou, ne ran kaoz-divenn nemed a-eneb eun alvokad.

An aotrou Laou

N'am-eus ket ezomm a alvokad. *(Ennañ e-unan)*. Eun dra benag en-deus e stumm.

An aotrou Pateleenn

Me 'n em denn kuit eta.

An aotrou Bartolin

Chmit ha grit ho kaoz divenn.

An aotrou Pateleenn

Mez, aotrou...

An aotrou Bartolin

Chomit, pa lavaran deoh. Me 'fell din, da nebeuta, kaoud eun alvokad em aodiañs. Mar get kuit, me groazo ahanoh diwar ar roll.

An aotrou Pateleenn

(E-unan, en em guzad gand e vouchouar)

En em guzom gwella ma helfom.

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Laou)

Aotrou Laou, c'hwi eo ar goulenner. Kaozeit.

An aotrou Laou

C'hwi 'ouezo, aotrou, penaoz an haillon-ze...

An aotrou Bartolin

(o troha e her).

Pas komzou divalo.

An aotrou Laou

Mad, al laer-ze...

An aotrou Bartolin

(o troha e her)

Galvit dre e ano, pe dre hini e vicher.

An aotrou Laou

Kement-se, pa lavaran deoh, aotrou, ar fallagr-se a bastor, en-deus laeret din c'hweh-ugent dañvad.

An aotrou Pateleenn

Kement-se n'eo ket prouet.

An aotrou Bartolin

Petra ho-peus, alvokad ?

An aotrou Pateleenn

Eur boan dent vraz.

An aotrou Bartolin

Gwaz a ze, kendalhit.

An aotrou Laou

(e-unan)

Parbleu ! an alvokad-se, 'zo eun nebeud heñvel deuz paotr va c'hweh gwalenn vezer.

An aotrou Bartolin

Peseurt preuvenn ho-peus deuz al leroñsi-ze ?

An aotrou Laou

Peseurt preuvenn ! me 'werzas dezañ deh, me 'roas war hle c'hweh gwalenn... c'hweh-kant dañvad ha ne gavan em bandenn nemed pevar-hant pevar-ugent.

An aotrou Pateleenn

Me 'nah an taol-ze.

An aotrou Laou

(ennañ e-unan)

Va feiz, ma ne vijen o paouez gweled egile en e alter e kredjen 'vije aze va den.

An aotrou Bartolin

Lezit aze ho ten ha prouit an taol.

An aotrou Laou

Me her prou dre va mezer... da lavared eo dre va leor kontchou. Petra eo deut da veza ar c'hweh gwalenn... ar c'hweh-ugent dañvad a vank e-barz em bandenn.

An aotrou Pateleenn

Maro int gand kleñved an deñved.

An aotrou Laou

Penn glaz ! Me 'gred eo eñ e-unan.

An aotrou Bartolin

Ne naher ket ma vefe eñ en-defe greet an taol. Non est question de persona. Lared a reer deoh penaoz ho teñved 'zo maro gand kleñved an deñved. Petra a respontit da ze ?

An aotrou Laou

Respont a ran, respet deoh, eo faoz kement-se, e kasas gantañ dindan... en-deus o lazet evid o gwerza, ha deh, me va-unan (*ennañ e-unan*). O ! eñ eo (*D'an aotrou Bartolin*). Ya, gwerza a ris dezañ, c'hweh, c'hweh... Kavet am-oa anezañ oh ober an taol ha laza en noz eun dañvad.

An aotrou Pateleenn

(*D'an aotrou Bartolin*)

Gevier, aotrou, evid 'n em didamalloud deuz an taoliou en-deus roet d'ar paour-kêz pastor-mañ, an hini en eur vond ahann, evel m'am-eus lavaret deoh, ah a d'en em operi.

An aotrou Laou

(*D'an aotrou Bartolin*)

Pardie, aotrou barner, n'en-deus netra muioh gwir : eñ e-unan eo. Ya, kas a reas gantañ deh, deuz va zi, c'hweh gwalenn vezer, hag er beure-mañ, e-leh paea din va zregont skoed...

An aotrou Bartolin

Petra an diaoul a ra amañ c'hweh gwalenn vezer ha tregont skoed ? Beza eo, a gredan, question deuz deñved laeret.

An aotrou Laou

Gwir eo, aotrou, homañ 'zo eun afer all. Mez dond a refom dezi goude. Ne 'n em dromplan ket koulskoude. Gouzoud a rit eta penaoz 'oan 'n em guzet en kraou an deñved. (*Unan e-unan*). O ! Eñ eo sur a-walh. (*D'an aotrou Bartolin*) En em guzet e oan eta e-barz en kraou an deñved : gweled a ris o tond an haillon, hag eh azezas eno. Kemer a reas eur pezh dañvad ha... ha gand komzou kaer, e reas kerkoulz, ma kasas gantañ c'hweh gwalenn.

An aotrou Bartolin

C'hweh gwalenn dañvad !

An aotrou Laou

Nann, mezer, en... Sakre kanfard a zen.

An aotrou Bartolin

C'hweh gwalenn vezer, hag an den-ze, distroit d'ho teñved.

An aotrou Laou

Distrei a ran dezo. An haillon-ze, eta, o veza tennet e gontell deuz e hodell,... me 'lavar va mezer... nann, lavared mad a ran e gontell, e ! e ! e ! e lakaas evel-henn dindan e robenn, her hasas gantañ d'e di, hag er beure-mañ, e-leh paea din va zregont skoed, e nah ouzon mezer hag arhant.

An aotrou Pateleenn

(O c'hoarzin)

A ! A ! A !

An aotrou Bartolin

D'ho teñved, pa lavaran deoh, d'ho teñved !

An aotrou Pateleenn

(O c'hoarzin)

A ! A ! A !

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Laou)

Ola ! C'hwi 'zo er-mêz ho rezon, aotrou Laou. Huñvreal a rit-hu.

An aotrou Pateleenn

Gweled a rit, aotrou, ne oar ket petra lavar.

An aotrou Laou

Her gouzoud a ran mad-tre, aotrou. Laeret en-deus din c'hweh-ugent dañvad, hag er beure-mañ, e-leh paea din tregont skoed evid c'hweh gwalennioliu kistin, en-desu va faeet gand malvennou du, ar gardanodez Calypot, taral la²², va homer pa zañsan. Petra an diaoul eh ouzon-me c'hoaz deuz ar pezh ma'z eo eet da glask ?

An aotrou Pateleenn

(O c'hoarzin)

A ! A ! A ! Diod eo !

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Laou)

En gwirionez... Sellit²³, aotrou Laou, oll lez warnon ar rouantelez, asamblez ne gomprenfont netra eno hafer. Tamall a rit ar pastor-mañ da veza laeret deoh c'hweh-ugent dañvad ha c'hwi a gemmesk e-barz, c'hweh gwalenn vezer, tregont skoed, malvennou du, mil gaoz neant all. E ! distroit d'ho teñved, pe me 'h a da leusken ar pastor-mañ kuit. Mez greet am-ije gwelloc'h ouz iñterroji va-unan. *(D'ar pastor)*. Tostait amañ... Peseurt ano hopeus ?

Ar Pastor

Bee...

An aotrou Laou

²² taral la : ?

²³ Sellit : Seit, er skrid orin.

(D'an aotrou Bartolin)

Gevier a lavar. E ano 'zo Pastor.

An aotrou Bartolin

Pastor pe bee, n'eus forz. *(D'ar pastor)*. Lavar din ha gwir eo penaoz an aotrou 'n-eus tamallet ahanout da veza lazec c'hweh-ugent dañvad ?

Ar Pastor

Bee.

An aotrou Bartolin

Ola, an aon rag ar justis a drubuill ahanout marteze. Selaou, na gemer ket aon... An aotrou Laou, da gavet en-deus ahanout en noz o laza eun dañvad.

Ar Pastor

Bee...

An aotrou Bartolin

O ! o ! petra a fell an dra-mañ rei da gompren ?

An aotrou Pateleenn

An taoliou en-deus roet dezañ war e benn o-deus badinell e empenn dezañ.

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Laou)

Tor²⁴ vraz ho-peus, aotrou Laou.

An aotrou Laou

Me, tor ? Unan a laer va mezer, unan all va deñved, unan all a bae ahanon gand kanaouennou, egile gand bee, ha c'hoaz, mardoue, em-eus tor ?

An aotrou Bartolin

Ya, tor. Ne gler morse skei, dreist-oll war ar penn.

An aotrou Laou

O ! ventrehien²⁵ ! noz 'oa, ha pa skoan, me 'sko partoud.

An aotrou Pateleenn

(D'an aotrou Bartolin)

Anzaou a ran an taol, aotrou. Habemus confitentem reum.

An aotrou Laou

O ! ke, ke, confitarem, te a baeo din-me va c'hweh gwalenn vezer, pe an diaoul da zammo !

An aotrou Bartolin

Hag atao mezer ! Amañ e reer goap ouz ar justis. Er-mêz a lez-varn hag a brosez, heb dispign.

²⁴ Tor : galleg : gaou.

²⁵ ventrehien : ?

An aotrou Laou

A ze, me 'ra appel²⁶. (*D'an aotrou Pateleenn*), hag evidoh, aotrou an trubard, ni 'n em welo.

(Modn a ra kuit

²⁶ Appel :galleg.

Trede leh c'hoari

An aotrou Bartolin. An aotrou Pateleenn. Ar Pastor.

An aotrou Pateleenn

(D'ar Pastor).

Trugareka an an aotrou barner.

Ar Pastor

Bee... bee...

An aotrou Bartolin

A-walh evel-se. Kee buan da operi, paour-kêz malevruz.

(Mond a ra kuit)

Pevare leh c'hoari

An aotrou Pateleenn. Ar Pastor

An aotrou Pateleenn

O ! se ! Dre va izign em-eus tennet ahanout deuz eun afer en hini 'oa peadra da lakaad d'az krouga. Dite-te eo bremañ da baea ahanon mad, evel ma'poa prometet din.

Ar Pastor

Bee...

An aotrou Pateleenn

Ya, mad-tre ah-eus c'hoariet da bez ; mez bremañ eo red din kaoud arhant ; entend a rez ?

Ar Pastor

Bee...

An aotrou Pateleenn

E ! Lez da vee... N'eus kaoz ebed ken deuz a ze ;n'eus amañ bremañ nemedout ha me ; c'hoantaad a rez-te ober ar pezh ah-eus prometet, ha paea ahanon mad.

Ar Pastor

Bee...

An aotrou Pateleenn

Penaoz, kokiñ, e vefen tapet mad gand eun dañvad gwisket ? Penn fall, paea a ri, pe ...
(*Ar Pateleenn a red kuit*)

Pemped leh-c'hoari.

Coleta (*en kaoñ*²⁷). **An aotrou Pateleenn**

Coleta

E ! Lezit-hañ da vond, aotrou ; e draou ez eus kistion.

An aotrou Pateleenn

Penaoz 'ta ?

Coleta

An taoliou a ra ar van da veza bet war e benn, o-deus greet deom soñjal en eun doare gwirion da lakaad an aotrou Laou da gonsañti dimezi e vab gand ho merh. Ne vefet ket paeet mad ?

An aotrou Pateleenn

Daoust ha posubl e vefe ?... Mez da biou az-peus-te kaoñ ?

Coleta

Ar Pastor en-deus lavaret d'ar barner eh a da lakaad 'n em operi ; hag ez eo marvet en operasion ;hag an aotrou Laou en-deus e lazet.

An aotrou Pateleenn

A ! Gweled a ran a betra eo kistion.... A ! mad-tre entend a ran²⁸.

Coleta

Sikourit ahanom mad hepken : me 'h a da houlenn justis digand an aotrou barner.

(Mond a ra kuit)

²⁷ *kaoñ* : *kañv*.

²⁸ mad-tre entend a ran :brezoegg fall : mad-tre eh entendan.

C'hwehved leh c'hoari

An aotrou Peteleenn

(e-unan)

En gwirionez, ar pezh emañ o paouez gweled ha rei dezañ êzet kredi eo maro ar Pastor, ha dre voneur, an aotrou Laou a zo 'n em damallet e-unan. Red eo anzañ penaoz ar pastore a zo eur hokiñ karget a droiou pleg ! Tromplet en-deus ahanon va-unan, me an hini a dompl a-wechou ivez ar re all ; mez e bardoni a ran, mar gell dre e izign lakaad ober eun dimezi pinvidig d'am merh.

Seizved leh c'hoari

An aotrou Bartolin. Coleta. An aotrou Pateleenn

An aotrou Bartolin

(da Goleta).

Petra a leverit-hu din aze ? Ar paour-kêz paotr ! Setu aze eur maro buan.

An aotrou Pateleenn

Ar gêridenn oll a oar se dija. Evel ar maleuriou a erru buan !

Coleta

(oh ober ar van da ouela)

Hi ! hi ! hi !

An aotrou Pateleenn

(D'an aotrou Bartolin)

Ar paour-kêz plah yaouank ! Afer fall evid an aotrou Laou.

An aotrou Bartolin

(da Goleta).

Me 'rento justis deoh ; na ouelit ket kement-se.

Coleta

(oh ober van da ouela)

Va amorous 'oa ; é ! é ! é !

An aotrou Bartolin

'N em goñsolit eta ; ne oa ket c'hoaz ho pried.

Coleta

(oh ober van da ouela)

N'am-ije gouelet dezañ kement, ma vije bet va pried. hi ! hi ! hi !

An aotrou Bartolin

Kastuzet e vo ; ha dija, war ho klemm, em-eus roet urz d'e gemered dre guz, hen degas din amañ a glee²⁹. Mond a ran koulskoude evid ar furm da vizita ar horv. Aze ema a levered. En ti ho tonton, ar medisin ? Me 'zistroio a-benn eur pennad.

(Mond a ra kuit)

²⁹ glee^r : dlee^r.

Eizved leh c'hoari

An aotrou Pateleenn. Coleta.

An aotrou Pateleenn

Ez a da zizolo toud, ma ne gavo ket an hini maro.

Coleta

Lezit hañ da vond. Va zonton a zo e-unan ganeom, hag ar pastor en-deus fabriket eru penn er gwele, ha rei dezañ mond kuit buan.

An aotrou Pateleenn

Mez unan er gêriadenn a welo marteze ar Pastor.

Coleta

Eet eo bremañ da 'n em guzad en chanil³⁰ ar foenn unan deuz on amezeien, ha ne zortio ahan nemed pa vezo koñvennet³¹-tre an dimezi.

³⁰ chanil : ?

³¹ koñvennet : ?

Naved leh c'hoari

An aotrou Bartolin. An aotrou Pateleenn. Coleta

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Pateleenn)

Nann, em buhez n'am-eus gwelet penn den evel henez ; an taoliou pe an operasion o-deus hen dishreet nêt ; n'en-deus ket hepken dremm eun den, ha n'am-eus ket gwelet ha selled outañ heb distrei va daoulagad.

Coleta

(oh ober van da ouela)

A ! A ! A !

An aotrou Pateleenn

(D'an aotrou Bartolin)

Na ! me 'm-eus truez deuz ar paour-kêz Laou ; beza oa eun den mad, eur blijadur ober afer gantañ.

An aotrou Bartolin

Me 'm-eus truez outañ ivez, mez petra ober ? Setu aze eun den maro, hag e vuia-garet da houlen justis.

An aotrou Pateleenn

(Da Goleta)

Coleta, petra 'dalvezo dit lakaad e grouga ? Ne vefe gwelloc'h evidout...

Coleta

(o troha e her)

Allaz, aotroun me n'en-don na selluz, na vañjañzuz, ha ma vije ennañ eur simill onest bennag. Gouzoud a rit pegement e karan va mestrez ho merh a zo fillorez d'an aotrou !

(o tiskouez an aotrou Bartolin)

An aotrou Bartolin

Va fillorez !... Ahanta, peseurt interest he-deus en oll draou mañ ?

Coleta

Valerian, aotrou, mab penher an aotrou Laou, a zo heh amouruz hag a hoanta dimezi. He zad a refuz konsañti da ze : c'hwi a zo ken gouizieg an eil hag egile. Gwelit ha ne vefe ket eur simill bennag abalamour d'an oll da veza kontant.

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Pateleenn)

Ya, red eo d'ar plah yaouank-se en em denna deuz e enklask, gand kondision ma teuio an aotrou Laou da gonsañti d'an dimezi-ze.

Coleta

Na, kement-se a zo kavet mad.

An aotrou Pateleenn

(D'an aotrou Bartolin)

Se 'zo kement hent an douster.

An aotrou Bartolin

A-raog hen lakaad er prizon e tleer her degas din : red eo din komz dezañ va-unan deuz se, mez c'hwi a gonsant da ze ivez, aotrou Pateleñ ?

An aotrou Pateleñ

E ! n'em-oa greet mennoz c'hoaz da zimezi va merh... koulskoude... evid savetei buhez an aotrou Laou, alo... alo... me a zikouro ivez, ha doaniet e vefen da lakaad krouga eun den.

An aotrou Bartolin

Me 'gleo hen degas din... *(Da Goleta)*, c'hwi, it buan da lakaad enterri en kuz an hini maro, evid na vin ket tamallet da vond a-eneb al lezennou.

(Coleta a ya kuit)

Degved leh c'hoari

An aotrou Bartolin. An aotrou Pateleenn

An aotrou Pateleenn

Ha me, evid ar furm, me 'h a da lakaad ober eur gwir a gontrad, a refet dezañ sina, mar plij ganeoh.

Unnegved leh c'hoari

An aotrou Laou. Daou vevel urcher. An aotrou Bartolin

An aotrou Bartolin

(D'an aotrou Laou)

A ! setu c'hwi amañ ! E ! mad, gouzoud a rit, aotrou Laou, perag ez oh bet arretet ?

An aotrou Laou

Ya. Ar hokin-ze a bastor a lavar eo maro.

An aotrou Bartolin

Beza ez eo, en gwirionez ; me 'zo o tond deuz e weled va-unan, ha c'hwi hoh-eus anzavet an taol.

An aotrou Laou

Ar vosenn ra vo diouzin.

An aotrou Bartolin

O ! me 'm-eus eun dra da ginnig deoh ; ne zalh nemed ouzoh hoh-unan 'n em denn a afer ha da zistrei d'ho ti en liberte.

An aotrou Laou

Ne zalh nemed ouzin ? Ho servijer eta.

An aotrou Bartolin

O ! gortozit, red eo gweled da genta ha c'hwi a vefe gwelloh ganeoh dimezi ho mab evid beza krouget ?

An aotrou Laou

Propozision gaer ! N'em-eus c'hoant nag an eil nag egile.

An aotrou Bartolin

En em egsplika a ran : c'hwi ho-peus lazet ar Pastor, n'eo ket gwir ?

An aotrou Laou

Kannet em-eus anezañ ; mar deo maro eo dre e faot.

An aotrou Bartolin

Ho faot-c'hwi eo, selaouit : an aotrou Patelenn en-deus eur verh fur ha kaer.

An aotrou Laou

Ya, ha paour eveltañ.

An aotrou Bartolin

Ho mab 'zo miniour³² dezañ.

An aotrou Laou

³² miniour : ?

E ! petra 'ra ze din-me ?

An aotrou Bartolin

Miniourz an hini maro hag eñ d'ho poursu mar konsantit d'o dimezi.

An aotrou Laou

Me ne gonsantan ket.

An aotrou Bartolin

(D'an daou vevel urcher)

Ra vezo kaset d'ar prizon.

An aotrou Laou

D'ar przion... maugredie³³ ! Va lezit, da nebeuta, da vond da lavared d'am zi pas chom d'am gortoz.

An aotrou Bartolin

(D'an daou vevel urcher)

Na lezit ket anezañ da dehed.

³³ maugredie : ?

Daouzegved leh c'hoari

An aotrou Pateleenn. Herriet. Valerian. Coleta. An aotrou Bartolin. An aotrou Laou.
Daou vevel urcher.

An aotrou Pateleenn
(D'an aotrou Bartolin)

Setu aze ar hontrad. *(D'an aotrou Laou)*. War ar gwalleur a zo erruet ganeoh, v oll
famill a deu da ginnig deoh o zervijou.

An aotrou Laou
(e-unan)

Nag a glufanerien !

An aotrou Bartolin

Alo, setu amañ an oll bartiou ; en em glevit buan ; ha c'hoant ho-peus-hu da 'n em denn
a afer ?

An aotrou Laou

Ya.

An aotrou Bartolin
(o lakad dirazañ ar hontred)

Sinit ar hontrad-se.

An aotrou Laou

Ne hoantaan ober netra dioutañ.

An aotrou Bartolin
(D'an daou vevel urcher)

D'ar prizon, hag an houarn en-dro d'an treid.

An aotrou Laou

An houarn en-dro d'an treid ! Dedie evel ma'z it !

An aotrou Bartolin

Se n'eo c'hoaz netra, me 'h a bremaig da lakaad rei deoh ar skourjez.

An aotrou Laou

Skourjez !

An aotrou Bartolin

Ya, ar skourjez ordinal hag egzaordinal, ha goude kement-se ne hellan mired da lakaad
ho krouga.

An aotrou Laou

Krouga ! Trugarez !

An aotrou Bartolin

Sinit eta. Mar daleit eur momant, ez oh kollet. Ne hallin ket ho savetei.

An aotrou Laou

Penazo ober ? (*Sina a ra*)

An aotrou Bartolin

Klevet am-eus lavared gand eur medisin brudet : an taoliou war ar penn ‘zo dañjeruz evel an diaoul. (*Goude m'en-doa vinet³⁴ an aotrou Laou*). Setu aze hag a zo mad. Me ‘h a da deuler en tan paperou ar prosez ha me o meul gand joa.

An aotrou Laou

Ya, greet am-eus hirio aferou kaer.

An aotrou Pateleenn

An enor deuz hoh alliañs.

An aotrou Laou

Ha ne goust ket kalz deoh.

Valerian

Va zad, me a dou penaoz...

An aotrou Laou

(O troha e her)

Kerz gand an diaoul.

Herriet

Me ‘zo fachel.

An aotrou Laou

(O troha e her)

Ha me ivez.

Coleta

Petra a rofet din-me en plas va muia-karet ?

An aotrou Laou

An deñved en-deus laeret din.

³⁴ *vinet* : ?

Trizegved ha diweza leh c'hoari

Eur Peizant. Ar 61astor. An aotrou Pateleenn. An aotrou Laou. Valerian. An aotrou Bartolin. Herriet. Coleta. Daou vevel urcher

Ar Peizant
(*D'ar Pastor*)

Bale, bale, dre urz ar Roue.

Ar Pastor

Trugarez.

An aotrou Laou

A ! Treitour ! Te n'out ket maro ? red eo din da vouga ; ne gousto ket muioh din.

An aotrou Bartolin

Gortozit. (*D'ar peizant*). A beleh e sorti an aotrou-mañ ?

Ar peizant

Kavet on-deus al laer-mañ en or chanil. Setu perag hen degasom d'ar prizon.

An aotrou Bartolin

O ! ola ! te n'eus ken merk an taoliou en da benn.

Ar Pastor

Hañ ! Feiz, nann.

An aotrou Bartolin

Petra eta zo diskouezet dn-me en eur gwele en ti ar medisin ?

Ar Pastor

Penn ar leue 'oa.

An aotrou Laou
(*D'an aotrou Pateleenn*)

Alo, peogwir n'eo ket maro rentit din ar hontrad-se mar hen difrezañ.

An aotrou Bartolin

Se 'zo just.

An aotrou Pateleenn
(*D'an aotrou Laou*)

Ya, en eur baea din eun dilavar hag a gousto deg mil skoed

An aotrou Laou.

Deg mil skoed ? ... Red eo din dre forz lezel an dra evel m'ema ; mez c'hwi a baeo din an tri-hant skoed deuz perz ho tad ?

An aotrou Pateleenn

Ya, en eru degas din e villed.

An aotrou Laou

E villed ?... Ha va c'hweh gwalenn vezer ?

An aotrou Pateleenn

Se 'vezo prezant an eured.

An aotrou Laou

An eured ?... Da nebeuta 'tañvin ar hanard.

An aotrou Pateleenn

Debret on-deus anezañ da lein.

An aotrou Laou

Da lein ?... (O tiskwel ar Pastor). O ! Ar fallagr-se a baeo evid toud hag a vo krouget !

Valerian

Va zad, poent beo hen anzañ, n'en-deus greet netra nemed va urz.

An aotrou Laou

Setu me paeet mad deuz va mezer ha deuz va deñved.

Trede leh c'hoari